

Fiselennoù ha gwiadoù

Diskouezadeg « skrin » - C'hwevrer-Eost 2012

Abalamour da betra en deus divizet mirdi Breizh diguzhañ ur stern gwiader bras eus e sanailhoù ha lakaat anezhañ e-kreiz dastumadoù an diskouezadeg-pad ?

Da gentañ, evit kinnig deoc'h ur mekanik gwiadiñ hep e bar, ijinet en Uzel (Aodoù-an-Arvor) gant Joseph Léauté, e-tro 1900. Da eil, evit diskouez n'eo ket ar stern-mañ un testeni eus ar boazioù a c'hiz kozh evel ma c'hellfed krediñ o welet anezhañ, met, en enep da se, un testeni eus ar youl a oa bet er bloavezhioù 1880 da reiñ lañs d'ar gwiaderezh a galite uhel en-dro.

Kinnig a reomp deoc'h pourmen e palieroù an diskouezadeg-pad da zizoleiñ gwiadoù diguzhet a-ratozh evit an diskouezadeg-« skrin »-mañ hag a bled dreist-holl gant div blanedenn ar gwiaderezh e Breizh :

- Eus un tu, lien a c'hiz ar gwiaderezh dorn, « tennet eus ar stern gwiader », o tont war wel en-dro, goude ma oa aet ar wiaderien war baouraat e-pad dekvloaziadoù ha dekvloaziadoù betek mont da get. Joseph Léauté, etre 1880 hag ar bloavezhioù 1920, ha Mark ar Berr e Kemper hag e Lokorn er bloavezhioù 1930, o doa roet lañs en-dro d'ar gwiaderezh. An daou-se o doa lakaet en o soñj kas war-raok ar produerezh lien « graet gant daouarn micherourien » ha reiñ labour da artizaned ar vro a-benn diwall anezho diouzh an divaeziadeg.
- Eus an tu all, danvezioù diwar ar gwiaderezh mekanikel aozet e labouradegoù pell diouzh Breizh alies, o tont da aloubiñ ar vro gant traezoù deuet da vezañ divoas hiziv an amzer goude ma oant traezoù eus ar vuhez pemdeziek gwezhall.

Ha nevez zo eo cheñchet penn d'ar gizioù dilhad : bremañ e vez lakaet ar « pilhoù » lin pe kanab a veze gwisket gwezhall gant ar beorien e renk kentañ ar gizioù divezel.

Da-geñver ar programm rannvroel « 2012, bloavezh al lin hag ar c'hanab e Breizh » eo kinniget an dastumadoù-se gant mirdi Breizh.

Diskar ha paourentez

En e vleuñv e oa ar gwiaderezh e Breizh e-pad pell, e-keit ha ma oa micherourien stank war ar maez ha marc'hadourien-lien hardizh hag en o aez. Adalek ar 16vet kantved betek deroù an 19vet kantved e padas ar vrud-se. War an diskar ez eas ar gwiaderezh graet er gêr adalek kreiz an 19vet kantved, diwar-goust an oberiezh mekanikel, el labouradegoù, pell diouzh Breizh. Ha tamm-ha-tamm e voe graet gant kotoñs ha neket gant lin.

Goude ma oa bet micherourien a-vil-vern o nezañ hag o wiadiñ kanab, gloan ha lin gant an dorn, ne oa ken nemet un nebeudig gwiaerien er gêr rediet da c'houlenn an aluzen evit treuzvevañ.

E 1712 e oa 600 stern gwiaer e Kintin (Aodoù-an-Arvor). E 1763 e oa bet renablet 3500 anezho war ar maez. Ur c'hrennlavar a oa :

« An neb n'en devez ket lin, n'en devez ket lin »

Hervez an istorour Jean Martin e oa 35 000 a dud o vevañ diwar an obererezh-se en 40 parrez a oa e kreisteiz Sant-Brieg.

Met notennet en doa ivez e oa 30 000 a dud nebeutoc'h o chom er c'hornad-se etre 1779 ha 1836 hag e tlee ar wiadieren goulenn an aluzen.

Breizh : ur merk a ziforc'h hag a galite, evit gwerzhañ.

Skeudennoù eus Breizh diwar ar maez hag ur gwiaderezh a feson : setu penaos ez eus bet roet lusk da genwerzh al lin.

Skeudenn ur Vretonez gwisket gant dilhad ar vro pe hini ur gwerzher follennoù-nij o stagañ gant un ton hengounel a oa trawalc'h da vrudañ al lien war brudfollennoù moulet a vras.

Evit taolenniñ ar merc'hed n'eus ket boutinoc'h eget skeudenn an nezerez. E-touez ar skouerioù niverus eus merc'hed o labourat, skeudenn an nezerez eo an hini zo bet implijet ar muiañ gant an dreserien, al luc'hskeudennerien pe an engraverien. An embannerien kartennoù-post o deus bet graet kalz ganti ivez, o liammañ anezhi gant vertuzioù al labour dorn hag ar skiant-prenañ (merc'hed kozh a veze war ar pep brasañ eus ar skeudennoù). A c'hiz koshoc'h c'hoazh eo an arvestoù pa vez ur c'harr-nezañ dindan an amzer ouzhpenn-se.

Ur skeudenn zo bet gwelet stank ivez war al listri feilhañs ha war ar gwiadoù moulet eo hini ur vaouez gwisket gant un davañjer ledan da wareziñ anezhi ouzh poultrannoù al lanfas ha bep tro gant ar memes ardivink : ur gegel a denn mechennoù moan diouti a-raok rollañ anezho war ur werzhid.

Labour

Dre ma oa boas ar c'hevredigezhioù hengounel d'ober gant lin ha kanab e oant techet da implijout anezho stank-ha-stank. Estreget war dachenn ar gouelioù, ar mezher hag an dilhad e voe graet gant ar gwiadoù-se eta. Kreñv a-walc'h e oant d'ober tavañjerioù solut ha ken levn all ivez d'ober traezoù akomod a voe aozet tamm-ha-tamm gant plastik ; evel-se e voe graet ganto evit aozañ bidonioù dour, mechennoù lampoù strilheoul, ha seier glaou zoken.

Pilhoù ha truilhoù

Ma oa stummoù liesseurt gant ar gwiskamantoù eured ha gouel hervez ar renk sokial pe ar c'hornad-bro, e oa « kozh gwiadoù dideuc'h » eus ar c'hreziou hag eus an dilhad pemdeziek avat ha heñvel-mik e oant eus an eil lec'h d'egile. Dre lodoù daouzek pezh (daouzek a oa an unvez dleet) e vezent gwerzhet goude bezañ bet gwriet er vro. A-wezhioù ez aent d'ober troñsell an danvez priedoù.

Evit mont war vor

Traoù solut koustet pe gousto

Pep danvez a c'halle mont d'ober dilhad martolod. Gant lien ur ouel e veze trawalc'h alies. Evel-se e veze aozet ar c'hapoù.

Gant mekanikoù e veze gwiadet an dilhad martolod, daoust ma vezent gwelet evel dilhad hengounel, e dibenn an 19vet kantved hag e deroù an 20vet kantved ; ret e oa dezho padout gant an dour mor, gant ar pesked, gant koad ar bigi. Ret e oa dezho gwareziñ ar c'horfoù ouzh ar glav hag ar yenijenn ivez, pa ne servijent ket da ballennoù e-kerzh an nozvezhioù hir war vor pe er porzh

Evit en em wareziñ

Alies e veze aozet ar c'hapoù e stalioù fardañ gouelioù e-lec'h ma veze amprestet mekanikoù d'ober gwriadennoù peuzvat gant lien-gouel. Gant ar c'hapoù-se e rae an holl besketaerien sardin d'en em wareziñ war vourzh o bagoù bihan.

Kuzhat ar c'horf...

Kozh-Noe e c'hell seblantout stumm an dilhad a veze gwisket gant ar merc'hed kentañ o vont da gouronkañ er mor e-kreiz an 19^{vet} kantved e Breizh, pa geñverier gant bragoù pe saeoù-kouronkañ a vremañ.

Koulskoude e rae oberierien ar c'houlz-se gant doareoù greantel ma veze gwiadet gant mekanikoù. Strizh e oa ar gwiadoù evit padout en dour.

Dre ma oa yac'h kouronkañ eus un tu ha ma oa ret bezañ kran eus an tu all e oa dilhad-kouronkañ dibar ivez. Goude-se ez int bet degemeret gant bed an dilhaderezh ha meur a zilhad kêr zo bet savet diwarno, en o zouez ar gwiskamant martolod brudet a veze gwisket d'ar vugale e Pariz.

Gwrierezed o saeoù...

« Gwrierezed o saeoù » a veze graet anezho. Gwriat e oa o micher, en o stalig peotramant evit stalioù bras. 78 a oa anezho en Il-ha-Gwilen e 1931.

Met er gêr e chome ar wreg-tiegezh.

Drailhennoù gwiad o tont eus labouradegoù gwiaderezh mekanikel a frammont an eil re ouzh ar re all, met ivez danvezioù « tennet eus ar stern gwiader ».

Adalek 1851 e teuas ar mekanikoù da wriat da vezañ benveg labour ur bern gwiragez-tiegezh. Eus un tu e laka anezho da chom er gêr hag eus an tu all e warant ul labour dezho e framm an dilhaderezh rannet. Met ma vez graet ganto gant ar micherourezed e plij ivez d'ar bourc'hizezed.

Gwiskamantoù

Solut e oa ar gwiskamantoù, ne vezent ket gwisket alies ha ne oa nemet unan e buhez un den. Aozet e vezent da vare an euredoù ha ne vezent gwisket nemet pa oa dleet ober pompad (euredoù, gouelioù er c'hêriadennoù...).

E-pad pell e veze graet gant ar memes danvezioù hag ar re implijet evit dilhad ar pemdez, betek ma voe graet ivez gant seiz, kotoñs ha voulouzoù ouzhpenn d'an danvezioù lin ha kanab implijet a-gozh.

Ar boaz e oa ober gant an danvezioù-se e-pad pell, met ouzhpennet e veze gloanoù liv e-barzh danvezioù cheuc'hoc'h anvet droged.

En tu all d'an danvezioù e roe an dilhad da gompren ar pezh a veze tavet dre gomz ; krennlavaroù, kanaouennoù ha lavaroù a roe an ton.

Lokorn. Ur gêr gozh evit nevezin an artizanerezh

20 vloaz zo e oa aet gwiader diwezhañ Lokorn war e leve pa voe staliet an atalier Sant Ronan - « gwiaderezh dorn arzel » - gant an itron Pierre Andrieux ha Mark ar Berr, ganto ar soñj da oberiañ gwiadoù a zoare.

Prenet o doa 3 stern gwiader eus Konk-Kerne digant « atalier an askol glas » ha reiñ labour da 7 goprad a oa merc'hed yaouank eus ar gêriadenn.

Ma oa aet an ao. ar Berr kuit eus an atalier e 1938, e kendalc'has an itron Andrieux ganti betek he marv e 1941.

Rikoù evit an daol pe rikoù te, rideozioù ha foñsoù divan a veze aozet.

Gant livioù, tresoù ha danvez gwiadoù an hengoun e raent.

Seiz Breur

Strollad arzourien ar « seiz breur » a oa bet krouet e 1923 diwar youl René-Yves, Suzanne Creston ha Jeanne Malivel o doa lakaet en o soñj reiñ lañs en-dro d'an arzoù-kinklañ breton. Kontet o doa war Diskouezadeg etrebroadel an arzoù kinklañ dalc'het e Pariz, e 1925, evit brudañ o raktresoù kentañ diwar-benn an arrebeuri, ar prierezh hag al lien moulet.

Jeanne Malivel a oa e penn renerezh arzel ar c'hrouidigezhioù gwiadoù hag evit se e c'halvas « kenlabourerien » en-dro dezhi, anezho gwiaderien : J. Konan e Loudieg ha J. Léauté en Uzel. Hervez kont e vefe bet galvet J. Léauté kerkent hag e 1920 evit lakaat sevel sternioù-gwiader evit deskiñ ar vicher gwiadiñ d'ar merc'hed yaouank. Talvoudekaat an dilhad hag artizanerezh ar vro a oa o fal, evit aozañ lien a vremañ gant tresoù nevez. C'hoant o doa ivez da virout ar merc'hed-se er vro.

Aliañ a rae J. Malivel d'ober gant lien ar vro gant lin, kanab, gloan ha kotoñs, gant an drogedenn, ar « garreau » hag ar rigodon, met ne rae nemet war-dro gwarnisadur ar c'hadorioù hag ar c'hadorioù-brec'h aozet diwar he goulenn gant ar munuzer Gaston Sébilleau, ha stignoù evit he familh hag he mignoned.